

SON AR MALTOUTER ⁽¹⁾

War eun ton anavezet

Jezuz, pegen kaer è
Kurunenn. pôtr Kerne,
Kerniel a beb koste,
War tal an dogan-ze.

Berr e kav an amzer,
Ar horgneg maltouter,
Pa ve, dre an hentchou,
O ruza e voutou,

O vesa ar hleuniou,
Ive porz ar bagou,
Ar mor hag ar pesked,
Koh ar vartoloded.

E-pad an amzer-ze,
Tomm del en he gwele,
E wreg zo c'hourignal
Gand eur maltouter all !

Evuruz an dogan
Klenk en e di bian,
O lemna e gerniel
Euz beg e wreg fidel.

Na karoud a rafen
Bea war he barlenn
O kana de ha noz
Kantik ar baradoz!!

(1) Bet lamet kuit diouz « *Bilzig* » war urz an oberour. S. ouz ar Pennad XI : *Bilzig hag ar Valtouterien*, p. 97 adembannur 1963. Dibenn ar henta islinennad a oa, war an dornskridou :

... Piou an-nevoa grêt an ouidell-ze ? Piou ? Tamall a rêd anezi da Jarlig koz. Setu-hi amañ penn-da-benn.

(Hag e teue da heul: *Son ar Maltouter.*)